

YF_0051_Lokarn

Pa vez diskennet koad Mael graet ar pleg er Pont-Glaz
E vez gwelet bourhig Lokarn doc'h tu neh d'an hent braz

Ma halon a zeu da domman ma daoulagad da ouelan
Pa welan kerig Lokarn ken seder ha ken dispar

Kalz joa a vez e-barz ma halon erruet e-touez tud a feson
Boud e-touez ma mignoned skanv e vez ma spered

En ma hreiz evurusted ma mouez sav drant meurbed
Da ganan gand kalz dudi d'am 'farrez meulodi

Sonjou tener a zeu wat o hiz hunvreoù ma yaouankiz
An amzer vad tremenet e-barz ma 'farrez karet

Ha kerkent e tarz an deiz em 'farrez e teu buhez
Laboused o kanan flour e-kreiz ar brouskoajou

Kaer eo gwelet gliz an noziou evel perlezennou
War glazennou bleun lirzin dindan heol ar mintin

Deuz ar menez d'ar ster vraz e ruilh sioul eun tammig gwaz
Baradoz ar pesketaer gand an nevez-amzer

Kaer eo gwelet ar mener n'eus forz peseurt amzer
Gand e vleuniou ken melen al lann hag ar balan

Ar paotr-saout pe ar menhir plantet e-kreiz ar menez
A zo oh evezian Breiz-Izel en eur rein tal d'an avel

Deuz aze e vez gwelet pevar horn on bro Breiz
Hag ar mor du-hont ken pell parrezioù Breiz-Izel

Brao eo klevet an evned kanan a-uz d'ar menez
Ar gwenan klask o zamm boued ken beo ha ken laouen

Gwechal ez aent on tadou koz aliez d'ar menez
Droc'han brug gand mizerou hag gand kalz a boaniou

Breman ez a an dud da bourmen dre kuriuz war ar menez
Evid kemer an aer vad ha disamm o spered

Me ho ped merhed, paotred it d'ober eun tamm bale
Evid gweled tenzorioù Lokarn, ho menezioù Kerne